



PRIZ AR YAOUANKIZ 2016

Da gelennerien brezhoneg skolajoù ha liseoù Breizh

Demat,

Evit 2015/2016 e vo 6 levr war ar renk, kinniget d'an holl rummadoù divyezhek (Diwan, Dihun, ha Divyezha) e Breizh ha votet e vo gant an holl e miz Mae.

Evit ar re 6vet / 5vet

Maelig hag ar vorlaeron : un istor war vor, kontet brav doare Mac Orlan (Gabriel Goubin) ; *Loeiza* : e Maiork, e vez komzet galleg, met ken disheñvel eo ar vuhez pemdez evit ur skoliadez ! (Laurence Lavrand) ; *Jabadao Jobig* : avañturioù Job, ur bugel yaouank a veve gwechall e Lokireg (Herve Lossec, diwar kontadennoù Jo Le Lay)



Evit ar re bevare / kentañ

Beaj Lakvern : un istor *heroic fantasy* a-vremañ (Ewen Jacq) ; *Ar Morgazh* : ur romant polis hir ha kriz e Somalia (Jakez Erwan Mouton) ; *Stourm e mor Skos* : tud yaouank o klask dont a benn da chaseal un iskis a loen ramzel-spontus er mor... (Clyde Belmont-Dlugy).

Disheñvel eo an istorioù, peadra da blijout d'ar re yaouank. Gallout a raio an tri skrivagner dont 'barzh ho klasoù a-benn mont war-raok gant al lenn.

10 euro e koust an dastumad 3 levr (pa vez prenet unan evit pep bugel, met 13 euro mod all). Un das-tumad a vez profet da bep kelenner a gemero perzh. Ur wech graet ho soñj, leugnit ha kasit ar follenn-respond da heul asambles gant ar chekenn da :

Keit Vimp Bev - 22 Grand Rue - 29520 Laz.

@ galon

fanny Chauffin, prezidantez fea

